

SON

Va Dousik Koant

Son ha ton nevez



Photo CHARROUIN, St-Pol-de-Léon

I

Ma karit rei d'in eun tammik peoc'h
Em beuz sonj da gana d'eoc'h,
Rag pell-zo e zoa em santimant
Kana d'eoc'h son va dousik koant.

II

Gant he bleo du, hi zo ker mignon
Ma stag da dridal va c'halon,
Me a sonj d'in n'euz ket war ar bet
Ker koant evel ma muia karet.

III

Pa vez ganthi he jikoloden
Pozet ker brao war he fenn
Hi vez kaeroc'h 'vit eur rouanez,
Evithi me rofe va buez.

IV

He daoulagad noz dei o vrilla
'Zo ker kaer ha leun a joa
'Vel ar stered zo er firmamant
O va dousik na te a zo koant.

V

Pa vezan awechou chagrinet
P'erru varnhon ar boan speret,
Pa sonjan ennout va dousik koant
Dioc'htu e passe d'in va foan

VI

En despet d'an teodou zo er vro
Ennout, noz deiz me a sonjo;
Rag den ebet me na selaouin,
Karout 'ran re va mestrez divin.

VII

Ma vije an teodou selaouet
Jamez den vije eureujet,
Rag n'int ket mad nemet da gass brud
Ha d' lakat fachiri 'tre an dud.

VIII

Ha te va dous, ouz da gostezen
Kass an teodou fall da bourmen,
Evelse, en dervez a zeuio.
Sur assemblez ni a zimezo.

IX

Da c'hedal ma erruo an dervez
Ma zeomp da veva assemblez,
Dalc'homp tost an eil d'egile
Ma chomo etrezomp amitié.

X

Araok echui va chanson
Rankan lavarar d'id mignon
Kred ac'hanon me vezo kountant
Pa c'hellin kouskat gant va dousik koant

Reproduction interdite.

Francis MOAL.